

MALHEURIOU

AR BOBL A FRANÇ

HAG HO INGRATERI E QUENVER DOUE

Var ton : *Quelven*, pe ton : *Santez Mari*.

O Doue oll galloudec hag ar guir Eternel,
Crouer demeure ar bed oll, ha Roue immortel,
Asten a ran va daouarn etrezec ag ennoc'h :
Sur ! netra na lavarinn heb cusul diguennoc'h.

Plijet guennoc'h, va Doue, clevout ous va feden,
Rag ma zoun an disterra euz ho servijerien ;
Me ho ped, roit d'in sicour, ma c'hellin explica
Ar malheuriou spontussa couezet var ar vro-ma.

Guelet a ran a beb tu va bro persecutet,
Ha meur a famil gristen zo casi revinet ;
Pa glasken gout ar pen cauz demeure a guement-ze,
E zeuz bet din respontet e teue abers Doue.

Consultet a meuz levriou deuz ar re savanta
Ha calz a bersonachou deuz ar re zantella
Assuret ho deveus din penaus oa guement-ze
Eur voalen ar pounnerra demeure a zourn Doue.

Da guenta abalamour ma or beus disprijet
Ministret ar guir Doue evit heulia ar bed,
Ha m'or beus great scouarn vouzar deuz ho aliou mad
En eur zont gant hon teod fall da zisprijout ho stad.

Abaoue ma zoun antreet em usaich a reson
Hag abaoue ma zoun guestl da ober attention,
A eneb ar veleien meus clevet alies
Meur a deodat milliguet, cals drouc-prezegueres.

N'hellan quet memes henti compagnounes ebet
E pehini na ve ket ar belec decriet,
Ha gant peb hardiegues e teuont da injuria
Ar re pere a zalc'h plas Jesus-Christ er bed-ma.

Setu aze ar pen caus ma e zeus bet eta
Eur zec'hor vras en hon touez epad an tri bloas-ma ;
Rag guelec a reomp scler er scridou ancien
Punition an injur a eneb ar veleien.

En amser ma zoa Achab roue en Israël,
Ha ma c'hounee ar re fall var an nep oa santel,
Persecuti a rejont oll beleien Doue
Hag an neb er servije ebars en amzer-ze.

Doue vit ho fuissa a bermettas eta
Na gouezas na gliis na glao eno epad tri bloa ;
Lacat a reas ar bobl-ze eu eur brassa anquen
Balamour ma zoant fallacr en andret ho beleien.

Sonjomp eta, ma breudeur, e ma ar veleien
Nos ha de o labourat evit ar gristenien ;
E peb moment e clasquont savetei hon ene
Hag hon renta pur ha net da vont dirac Doue.

Ha ni tud ingrat ma zoump ne glascomp quen moyen
Nemet d'ho disprijout vel hon adversourien ;
Gouscoude var hor maro n'euz nemet ar re-ze
Hag a c'helfe hor sicour da vont var zu an Ee.

Allas en amser bresant e ma persecutet
Ministret ar guir Doue e pevar c'horn ar bed,
Rag betec hon tad santel ar Pap Pii navet
En deuz collet he stadou, zo memes prisonniet.

Er c'heriou bras deuz ar Franç ar veleien ive
So, siouas ! en amser-ma e danjer ho bue,
Rag an dud fall arrajet a glase ho distruja
Ha ma c'helfent caout an tu he teufent d'ho laza.

Deuc skuis oc'h hor guclet evelse o veva
A c'halvas eur bobl barbar da zont d'hor punissa,
Ha gant eun arme spontus e zint antreet e Franç,
Vit dont da scoi ac'hanomp dr'er c'hleze ag al laus.

Laquet ho devez e goad, e ludu hag e tân
Quement a voa var ho hent oc'h antren er vro-man :
Revinet ho deuz ar vro, ha lamet ho buez
Digant meur a zen iaouanq euz a beb seurt lignez.

Adalec fin mis gouere beteg fin mis guenver,
E zeo padet ar glac'har e peb bro, e peb quer ;
Quele'het e voamp a beb tu, eb gout pelec'h n'em dreï,
Gant an oll Brussianet tro var dro oc'h hor squeï.

C'hoant a meuz da explica e nebeut a gomzou
Ar stad trist ha truezus demeus hon armeou
Ha demeus hor soudardet, e creis tân ar brezel,
Pere, siouas ! a goueze heb gallout mui sevel.

Strasbourg, ar gear burzudus, pehini a voa brudet
Dre he ilis cathedral couls ha dre he guenet :
Mes laquet eo e ludu quement a voa enni
Dre ar bombou prussian a scoe var-n'ez-hi.

Metz, ar c'hrenva quer brezel a oa ebars hor bro,
Pehini dre drahison zo quemeret gant-ho,
E pelec'h hor zoudardet epad tri mis amser
A grevas evel kelliën gant naon ha gant miser.

Monet a rân a speret beteg tachen Sedan,
Pehini ne vo biquen dizonjet er bed-man :
Rag eno eo e zeus bet eun affer drist meurbet
Etre Soudardet ar Franç ag ar Brussianet.

Hor soudardet malheurus goude bea combattet
Gant courach ha vaillantis oüs ho ennimiet
Zo bet draillet a bep tu gant ar mitrailleuset :
En em rei prisonnerien e zint bet obliget.

Sclapët e zint bet neuze en eur vro estranjour,
Ebars en exil c'huero, eb gallout caout sicour,
Da soufr an naon, ar sec'het, ar ienien gâlet :
Peb trubuil ha dienes o deveus anduret.

Paris, ar gueur admiret gant an nationou
Dre he ledandet dispar hag he oll balesiou,
Ar guer-ben demeure Bro-C'hall, brudet dre an oll bed,
Gant oll boblou an douar e zoa darempredet.

Mes deut e zeo da veza an dachen a vrezel,
He gloar ag he guenet a zo deut da vervel ;
Casimant he zeo chenchet e poultr ag e ludu
Gant eun harne a venjans he scoe a bep tu.

O lenn ar scritur sacr, e meuz gueleet en-na
Un exempl trist ha scrijus henvel deuz quement-ma,
E personaj pobl Judee, scoet gant he grouer,
Balamour d'al lachentez en doa en he guenver.

Var dro ar bloas c'huec'h cant c'huec'h, nebeutoc'h pe
Raoc ma tevas Mab Doue da en em ober den, [ouspen],
Ar Jugevien difeiz, ien e quenver Doue,
A souillas Jerusalem ag oll vro ar Judee.

Doue vit ho funissa a bermettas neuze
Da Nabuchodonosor distruja ar guer-ze :
Saillas a reas eta, gant eun arme spontus,
Var ar bobl disleal-ze, heb beza truezus.

Quemer a reas gant-han quement tra oa en-hi
Ha dre eun tan fuloret e tevas anezi :
Na jomas en he zilare'h na pignon na moguer ;
Pilla ha distruja reas quement tra voa e quer.

Ouspen-ze da Vabilon he cassas c'hoas gant-ha
Quement den e voa en-ni evit ho frissonnia ;
Ag er guer-ze he chomzont dec vloas ha triuguent,
O veva en ho exil gant ar brassa anquen.

Mes allas ! an dud paour-ze, exilet deuz ho bro,
Ne reont nemet gouela ag hirvoudi enno :
« Allas eta, quer Sion, quer Sion ! emezo,
« Eleach ma sonemp guechal quement hon trompillou.

« Biquen james ne gollimp ar memor ac'hanoc'h,
« Ebars eur vro estranjour, pell, pell bras diouzoc'h ;
« Lavaret a rer deomp cana hor c'hanticou, [bro].
« Mes n'ellomp sevel hor mouez gant ar glac'har d'hor

Ar profet Jeremias en devoa annoncet
Malheuriou Jerusalem ag he habitantet ;
Mes caer en devoa gouela, caer en doa aspedi,
Ato he rea scouarn vouzar quement den voa en-hi.

Ur jaden en dro d'he c'houg, he crie noz ha de
O velet ar malheuriou couezet var ar guer-ze :
« Hent quer Sion, emezan, a zo e caon eta,
« Rag ne velan den ebet o pourmen-var-n'ez-ha.

« N'eo mui ar merc'het iaouanq o vont gant pres hag
« Etrezec en-hoc'h, Sion, evit ar goueliou bras ; [hast]
« Jerusalem a grie gant eur vouez truezus :
« *Videte si est dolor sicut dolor meus.* » (1)

Setu aze christenien eun exempl scler ag eon
Demeuz an oll goalheuriou a zo coezet varnomp ;
Hor breudeur, hor mignonet so bet ive casset
D'an exil d'an Allamaign gant ar Brussianet.

Hag en-ho er meas ho bro, ho devez hirvoudet
Etrezec ty ho c'herent, hep gallout ho guelec ;
Lavaret ho deuz ive evel ar Jugevien :
« Allas eta, Breiz-Izel, n'ho cuelimp mui biquen. »

(1) Ar pez a sinifi : Guelit ag hen zeus eur glac'har henvel
ous va hini. Jerusalem rentet e ludu a zebiante laret quement-
ze, ag or c'heriou-ni distrujet a zebiant laret ar memez d'an
dremenidi.

Dezo ar Brussianet ho devez lavaret :
« Canit deomp canaouennoù e mod ar Vretonet ; »
Mes beuzet en ho daeloù, he respontent dezo :
« Penaus c'hellimp-ni cana quer pell demeuz hor bro »

Ar c'heriou bras dez ar Franç, pere zo distrujet
Ha laquet en eur stad truezus da velet,
A lavar deomp en eur dremen gant ho mouez glacharus:
Videte si est dolor sicut dolor meus.

Evel guechall an dud-ze, ni a zo bet ivez
Gourdrouzet gant hon Doue vit hor fallagriez,
Ha Mam Doue he unan a zo bet disquennet
Evit hon avertissa var menez ar Salet.

Avertisset oump bet c'hoas dre mouez hor beleien,
Dre ar bredicatoret, hor missionnerien
Dont da zistrei ous Doue dr'er guir gouverson
Evit calmi he goler prest da goueza varnomp.

Mes ni or beuz disprijet ho oll avisou mad
Ha dre bep seurt dismegans e teuemp d'ho goapaat,
Elec'h n'em gouvertissa dre eur guir binijen
Hor beuz tennet hon unan hor goalheur var hor penn.

Guechall ar bobl a Niniv, prest da veza flastret
Gant dourn an Autrou Doue balamour d'ho fec'het,
O cleout ar profet Jonas oc'h ho avertissa,
A zeuas oll var an heur d'en em gouvertissa.

Ar roue a zisquennas ractal divar he dron
Evit ober pinijen euz a greiz he galon ;
Ha Doue oc'h ho guelet a bardonas neuze
D'ar c'huec'h-uguent mil pec'her a oa bars er guer-ze.

Ha ni ive, pobl a Franç, m'hor bije silaouet
Deuz mouez an Autrou Doue ha mouez he Vinistret,
Evel pec'herien Niniv, ni vije preservet
Demeus an oll malheuriou a zo varnomp couezet.

Neuz nag antrou na paysant n'ha en dese santet
Ar bonez deus a zourn Doue ó coeza var ar bed ;
Mes oll paour ha pinvidic ag oll bras ha bian
Ho devez ranquet soubla dindan ar voalen-man.

An oll dud iaouanq capabl da zouguen an armou,
Obliget dre al lezen d'a guimniadi d'ho bro,
Ho deuz souffret pep tourmant, pep poan, ha peb miser
O loja epad en noz dindan ar goal amzer.

Ho c'herent ebars er guer na rent nemet gouela,
Chom a rent gant ho estlam heb dibri nag eva :
Ar sonj deus ho bugale a drouble ho repos
N'ellent quet memes cousquet alies epad an noz.

Ouspen-ze an dud infirm ag ar re demezet
An dud coz, ar vugale, quen goazet quen merc'het,
Oa cazi oll dismantret gant ar goal glenjejou,
Na vije quet cavet plas dezo er berejou !

Evel-ze e zoamp stoquet en tu-man en tu-hont
Gant coler bras hon Doue discarguet oll varnomp ;
Meur a zen just ha santel zo bet ive scoet
Hep beza dious ar re fall, siouas ! dispartiet.

Pet den iaouanq creis ho nerz a zo bet discaret
Var dachennou ar brezel, hep caout sicour ebet,
Hag ho devoa martreze pell amzer da veva,
Pae-se vit ar brezel a zo deut d'ho laza.

Cals anezo c'hoas memes n'ho doa ket meritet
Tourmanchou bras ha scrijus vel m'ho deuz gouzanvet ;
Souffret ho deuz evel-se evidomp pec'herien :
Doue ra raio dezo reposi da viquen !

Hag erfin, ma breudeur quer, hor beus gallet guele
Ar peoc'h sinet etrezomp hag ar Brussianet,
Sonjal a reamp dre eno gvel fin d'hon trubuillou,
Ha guelec or mignonet o tistrei oll d'ho bro.

Mes ar Republicanet deuz ar guer a Baris
A zo en em zastumet da zistrei var ho c'his
Evit douguen an armou a eneb ho mam-bro
Rag ne quet peoc'h, mez brezel, eo a felle dezo.

Ret eo bet d'hor zoudardet monet en dro dious-tu
Evit renqua en urz vad an dispac'herien ru :
Hag evel-ze ma an tad o clask laza he vab
Ar breur a enep he vreur, ar mab enep he dad.

Ah ! houman eo ar c'hoari seurt na ve quet gulet,
Ag eun dra drist ha spontus eo memes da glevet ;
Quement-ma a zo goassoc'h evit ar vec'h quenta,
Pedomp Doue ma c'hellimp lacat eur fin deza.

Ha pedomp c'hoas anezan da bellat diouzomp
Ar goal chans, ar goal vonneur zo arruet ganeomp ;
Pardonit, o va Doue, pardonit, ni ho ped,
Pe roit deomp c'hoas muioc'h mar hor beuz meritet!!

Nep neuz great ar recit-man a zo mab eur paysant,
Deuz a barres Bannalec, hanvet Yan ar Guiffant
Pini n'eur gonsideri oll malheuriou he vro
A zeu d'euz he zaoulagat diou feuteun a zaelô.

Nep a gano ar vers-ma a glefe lavaret
Eur *bater* hag eun *ave* vit he vro revinet,
Ive eun *de profundis* evit ar re pere
Var dachennou ar brezel n'euz collet ho bue.

YAN GUIFFANT.

Bannalec, an 28 Mae 1871.

Quimperlé, imp. TH. CLAIRET.